


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	8
	Kelaouennoù	29
	Notennoù	34

Herve LATIMIER

**Politiques du désordre,
La police des
manifestations
en France,**
gant Olivier Fillieule ha
Fabien Jobard
Le Seuil, 2020,
300 pajenn, 21€.



Aozerien al levr-mañ zo skiantourien Olivier Fillieule zo kelenner sokiologiezh ar politikerezh e skol-veur Lausanne ; Fabien Jobard rener a imbourc'hioù er CNRS. Diazezet eo o labour war enklaskoù, hag atersadennoù bet graet e-kerzh ouzhpenn pemp bloaz warn-ugent. Er penn-kentañ em eus bet un tamm diaezamant o kompren an titl.

Sklaeraat a ra an traoù tamm-ha-tamm ha sklaer da vat gant ar frazenn ziwezhañ. Gwelloc'h eo din reiñ anezhi d'al lennerien diouzhtu : « *Au final, lorsque les gouvernements refusent de reconnaître à la manifestation le pouvoir de peser sur les projets législatifs, le désordre et la violence se substituent à elles. C'est en cela que le maintien de l'ordre relève de politiques du*

désordre : *si la manifestation ordonnée et rituelle est privée de son pouvoir d'empêcher, quelle place accorder dans un régime démocratique moderne au désordre et à la contestation.* » Gwelet a reer ez eo, er penn-kentañ, un dibab a-berzh ar gouarnamantoù ha goude ur c'helc'h bac'h maget gant kemmoù an doareoù stourm ha kemmoù kenstur en emzalc'h ar polis hag an archerien o tegas muioc'h-mui a feulster. Tremen a reer eus ur politikerezh mirout an urzh d'ur politikerezh kastizañ an "dispac'herien" gwelet evel torfedourien. A-hed al levr e komprenner e tistroer en ur stumm da zoareoù kozh da verañ an traoù hag emañ Frañs, ur wech ouzhpenn, o tibab un hent kontrol d'an hini dibabet gant broioù all Europa. Etre an digoradur hag ar c'hlozadur e kaver c'hwec'h chabistr : « *La lente pacification de la police des foules* » ; « *Durcissement. Des années 2000 à nos jours* » ; « *L'ordre et son droit. De la liberté de manifester* » ; « *Autonomie et dépendance des forces de l'ordre. Le rapport au politique* » ; « *Face aux médias. La bataille de la communication* » ; « *La brutalisation du maintien de l'ordre* ». E fin

al levr e kaver, evel-just, ur bern notennoù (55 pajennad). O lenn ar chabistr kentañ e weler kemmoù gorrek war-du un doare sioulloc'h da verañ an traoù. Etre 1789 ha 1921 e oa peurliesañ soudarded a rae war-dro ar manifestadegoù, gant o boazioù pa oa skiant-prenet ganto ha riskl da bennfolliñ pa oant nevez er vicher. E Pariz e veze implijet ar boliserien. Alies e veze tud lazhet e-kerzh ar manifestadegoù. Ma tegas ar c'hemmoù sokial kemmoù en doare da "virout an urzh" ez eo krouidigezh rummadoù arbennik ha stummet a cheñch an traoù. *Gardes mobiles* evit an archerien e 1921 ha goude an eil Brezel bed ar CRSed (*Compagnies Républicaines de Sécurité*) evit ar polis. Anzav a ran e c'hell bezañ un tamm diaes gwelet se evel un araokadenn met o lenn al levr e weler ez eo gwelloc'h eget reiñ al labour d'ober da boliserien n'int ket na boas na stummet evit se, evel ma reer bremañ. Betek ar bloavezhioù 1990 e tiorren ur sevenadur a genvreutaerezh etre ar polis pe an archerien hag ar vanifesterien dre hanterouriezh aozerien ar manifestadegoù. Arlivioù a gaver abalamour da

sell ar polis war rummad-mañ-rummad, ar beizanted da skouer. En eil chabistr e teskriver ur c’hemm war an tu all. Un toullad traoù nevez a zegas kemmoù eus tu an nerzhioù-urzh : ar feulster en-dro d’ar c’hrogadoù sport ; ar manifestadegoù bras liesvroadel (enep ar G7 da skouer), ar “feulsterioù er c’hêrioù”, hag an taolioù sponterezh peurgetket. Eus un tu all e weler e-touez stourmerien zo doareoù nevez d’ober peogwir ne zegas netra, d’o soñj, ar manifestadegoù klasel. Aozer ebet barrek da vestroniañ un tamm an traoù ha da gomz gant ar polis... Dont a ra meur a wech skouer ar Chupennoù melen evit diskouez kemmoù a gas da vuioùc’h a feulster eus an daou du. Degas a ra ar prantad-se kemmoù war dachenn al lezenn ivez. Bepred war-du ur sell startoc’h...

An trede chabistr zo gouestlet d’ar gwir a-zivout ar manifestadegoù. Ar vanifestadeg n’eo ket termenet (« *liberté innommée* » p.91). Ma klask al lezenn reiñ bevennoù da implij an nerzh e weler dreist-holl gwirioù o kilañ alies a-drugarez d’ar “stadoù a zifrae” lakaet da dalvezout evit abeg pe abeg. « *La manifestation en France est une*

liberté tolérée, et les évolutions juridiques depuis le début des années 2000 montrent qu’elle est plus que jamais une liberté surveillée » (p.117). Daoust dezhañ bezañ teknel alies ez eo ar chabistr-mañ dedennus-kenañ gant ur bern titouroù ha skouerioù resis.

Titl ar pevare chabistr a ziskouez mat e vez kaoz eus an darempredoù etre an nerzhioù urzh hag ar galloud politikel. N’eus tost netra evit kempouezañ galloud ar Stad kreiz e Frañs evel er broioù kevreadel. Mestr eo sañset ar galloud politikel war an nerzhioù urzh. Koulskoude n’eo ket ken simpl-se an traoù war an dachenn. Lezet e vez peurliesañ ul lodenn vat a frankiz d’an archerien ha d’ar polis en abeg d’o barregzhioù micherel hag evit chom hep bezañ kiriek ma ’z eus un darvoud grevus. Kavet e vez el levr meizad ar « *chèque en gris* ». Forc’hellek eo : reiñ urzhioù met chom hep bezañ sklaer a-walc’h kuit da sammañ ar giriegezh. Abaoe 2015 e ro ar galloud ur frankiz brasoc’h c’hoazh d’an nerzhioù urzh o tidamall anezho bepred pe dost pa vez ur gwallzarvoud pe feulster re anat. Gwelet eo bet sklaer e-kerzh “emsavadeg” ar Chupennoù

melen. Seul vuioc'h e komzer eus sponterezh ha feulster hag e lakaer er programmoù politikel ar surentez evel poent kentañ, seul vuioc'h e vez ar galloud e dalc'h an nerzhioù urzh hag ar sindikadoù poliserien peurgetket. Er c'hlozadur e c'heller lenn : « *Depuis le tournant des XX^e et XXI^e siècles, qui a vu l'installation durable de la sécurité et des enjeux policiers dans le jeu politique, l'éclatement de l'offre syndicale et l'exacerbation de la compétition entre ces organisations, enfin la fréquence élevée de la menace terroriste, le politique se trouve en situation de forte dépendance, si ce n'est d'ancillarité, vis-à-vis de la police – de "sa" police, puisque la police est depuis avril 1941, une institution centrale, gouvernementale* » (p.146). Un diverrañ nec'hus eus an dielfennadurioù, an dielloù hag ar skouerioù a gaver er chabistr. Pledañ a ra ar pempvet chabistr gant ar c'hehentiñ, ar c'hemmoù degaset gant an teknikoù nevez hag ar seurt brezel a vez etre kelaouennerien ha nerzhioù urzh a soñj dezho bezañ taget dizehan gant mediaoù gwidreüs. Ur wech ouzhpenn titouroù prizioù o keñveriañ ar wirionez

gant ar fantasmoù, gwelet ar strategiezhioù kehentiñ. Ezhomm ebet da gomz pell diwar-benn ar chabistr diwezhañ, ken sklaer eo an titl « *La brutalisation de maintien de l'ordre* ». Ur bern dielloù a ziskouez splann ez a an traoù war-washaat hag e wel muioc'h-mui ar polis ar vanifesterien evel torfedourien a zleer kas dirak ar justis pe mirout outo da lakaat reuz ha n'eo ket tud o klask kemer o flas en diviz politikel demokratel. Ouzhpenn-se ez eo bet digresket niver ha danvez rannoù arbennik an nerzhioù urzh ha digresket ar stummadur dre ma koazhe ar budjedoù. Evit implij armoù zo, LBD (*Lanceur de Balles de Défense*) ha reoù all, e lenner p.210 : « *Mais la formation aux violences urbaines et la réduction des effectifs de forces mobiles peuvent toujours, en cas de tension, conduire à son usage [hini an LBD] en maintien de l'ordre. Cette situation est, aujourd'hui, singulière en Europe.* » Heverk eo, ur wech ouzhpenn, dibarded Frañs. Ha ket war an tu mat. « *Cette orientation en maintien de l'ordre depuis le milieu des années 2010 est d'autant plus surprenante qu'à la même période, tirant les leçons*

des logiques mortifères des grands événements altermondialistes, de nombreux États se sont tournés vers une doctrine de “désescalade”, appuyée sur les avancées récentes de la psychologie des foules » (p.194).

Ha tu vo da Frañs paouez da zistreiñ da benn-kentañ an XX^{vet} kantved ? Ha dont a raio a-benn da gemmañ he sell war

an doareoù da virout an urzh en ur gevredigezh demokratel ?

Lezel a raio an dud da zifenn o mennozhioù hep kaout aon ?

Deomp da glask pouezañ. Chom a ra deomp ar gwir da votiñ betek-henn...

**Histoire du Kurdistan,
Le point de vue Kurde,
Des origines à 1918,
Histoire du Kurdistan,
Le point de vue Kurde,
De 1919 à nos jours,**
gant Luc Pauwels,
Yoran, 2019,
504 fajenn, 12€ an tamm



Un tamm souezhus e vefe sevel ur pennad evit pep levr a zo, e gwirionez evel div levrenn eus an hevelep oberenn. A-hed an istor e kaver traoù heñvel : pobl gwallgaset o vevañ e meur a Stad, unvanet dre ar yezh hag ar sevenadur met leun a zisran-noù diabarzh met ivez brezelou-

rien ha brezelourezed kadarn. N'eus ket pell zo e krog ur gwir emskiant broadel diwar un aoza-dur tost gladdalc'hel diazezet war meuriadoù ha klanoù. Betek bremañ e weler un nebeud familhoù o ren politikerezh ar Gurded hag ar C'hurdistan. Mat eo e vefe merket war golo al levrioù

« *Le point de vue Kurde* » rak a-wechoù em eus santet betek re ne oa ket an aozer neptu. Meur a wech e lenner ez eo ar Gurded heverk evit ar plas roet d'ar merc'hed en o sevenadur – pezh zo gwir – ha pa weler (p.332 el levrenn gentañ) n'hell ket ar merc'hed choaz o fried hag e vez lazhet un avoultrerez (p.336 e memes levrenn) e kaver un tamm forc'hellek ar gaoz. Un dra en deus lezet ac'hanon war ma c'hoant eo an diouer a ditouroù war an ekonomiezh. Ma vez lâret alies eo bet drastet ar vro ne 'm eus ket kavet penaos e c'hell renerien zo sevel ur armead a veur a vil soudard hep na vefe pinvidik a-walc'h ar vro.

El levrenn gentañ e tesker ez eo ar Gurded diskennidi ar Veded kazi sur. Ur bobl indezeuropat int eta, evel ar Bersed, hendadoù Iraniz a-vremañ. Daoust d'o yezhoù bezañ disheñvel ez int o-div indezeuropat p'eo an turkeg ur yezh altaek hag an arabeg ur yezh semitek komzet en Irak ha Siria a-vremañ. Gwelet e vez ivez ar plas a oa hini ar Gurded en impalaeriezhioù a rene war ar Reter-Kreiz betek ma errufe an Arabiz hag an Islam. Prantadoù leun a feulster. Chomet eo an traoù

feuls-kenañ goude ; gant an enebourien boas met gant ar Vongoled en XII^{vet} ha XIV^{vet} kantved ouzhpenn. Ha biken n'eo deut a-benn ar Gurded da sevel ur Stad dezho. Kendalc'her a ra bremañ. A-hed ar prantadoù-se ha zoken dindan beli an impalaeriezh Otoman o deus ar Gurded bet un emrenerezh gwirion diazezet war meuriadoù ha priñselezhioù met aozadur unvan ebet. Ur chabistr 6 a bled gant relijionoù ar Gurded. Ar brasañ niver zo muzulman sunnit met kavet e vez en o zouez relijionoù all evel hini an Êzidi a zo bet gwallgaset en un doare kriz hag a zo c'hoazh. Tri chabistr (23, 24, ha 25) a gomz eus doareoù bevañ ar Gurded hag eus plas ar merc'hed en o zouez. Ur chabistr zo gouestlet d'ar Gurded evel brezelourien. Un dra a bouez en o istor. Ne vez ket ankouaet al lennegezh eveljust. Ar meskaj etre lodennoù a heuilh red an istor ha reoù all a bled gant un dodenn pe tud resis a laka diaes al lenner a vare da vare. Souezhusat tra, daoust d'ar Gurded bezañ ur bobl suj un nebeud anezho o deus bet kargoù uhel-kenañ er Stadoù a oa mestr warno. Desket a reer, peurgetket, eo a Saladin (Salah ad-Din Yusuf

Al-Ayyûbî, Selahedînê Eyûbî e kurdeg) ur C'hurd. N'eo morse simpl an traoù...

En XIX^{vet} kantved e krogas galloudoù bras ar mare da emel-lout en aferioù Reter-Kreiz ha da lakaat reuz ouzhpenn. Gwall-gaset eo bet ar Gurded ha pobloù all an tiriad evel-just. Tamm-ha-tamm e oa bet aozet un emsav broadelour kurd a glaskas difenn gwirioù e bobl el luziatez-se hag ar c'hentañ Brezel bed. Gwelet e vez penaos int bet touellet gant an emglevioù etre ar Saozon hag ar C'hallaoued evit rannañ an tiriad hep delc'her kont eus ar pobloù a veve ennañ (emglev Sykes Picot) hag ar feuremglevioù a echuas ar brezel. Ma voe un araokadenn vihan gant feuremglev Sèvres (10 a viz Eost 1920) : meneget e voe ur "C'hurdistan" met rannet ar vro etre meur a Stad, Armenia peurgetket, ha ne voe ket lakaet ar feuremglev e pleustr evit pezh a sell ouzh ar C'hurdistan. Edo Mustafa Kemal o tiazezañ e c'halloud adalek 1919...

Un dra kriz : e 1891 e oa bet krouet gant ar Sultan Abdulhamid II rejimantoù marc'hegezh Kurd en arme Turk anvet Hamidié, diwar skouer Kozaked an Tsar. Kemeret o deus ar re-mañ

o ferzh e gouennlazh an Armenianed, siwazh. Alies n'eo ket reizh an darempredoù etre pobloù gwasket gant ar memes Stad.

En eil levrenn e tostaer eus an amzer-vremañ. Feuremglev Lausanne e miz Gouere 1923 a skarzha araokadennoù hini Sèvres. Rannet eo ar bobl Kurd etre Turkia, Irak, Iran ha Siria. Pa ne vezont ket gwallgaset da vat e vez nac'het dezho an disterañ emrenerezh. Un toullad anezho zo en Armenia ha strewet un tamm dre ar bed. Emsavadegoù a vez alies, gwaskadur garv ivez. An Durked zo ar re washañ ma kreder keñveriañ. Diblas a reont milieroù a dud e-touez a re zo deut da vezañ "Turked ar Reter" ha lazhañ ur bern. Titloù chabistroù zo a ziskouez begen diaes eo sevel un emsav Kurd : « *La lenteur de la formation de la nation kurde* » (5), « *Discorde dans les rangs kurdes* » (13) ; « *La discorde envahit le mouvement national kurde* » (19). Kollet e vezer un tamm e niver ar strolladoù gant anvioù heñvel a-walc'h met gant dizemglevioù politikel niverus. Luziet eo an traoù dre m'eo heñvel an teskanvioù. Eüruzamant e kaver ul listenn p.11. Adalek ar 14^{vet} chabistr en

em gaver gant darvoudoù tostoc'h hag anavezet gant lod eus hol lennerien (Öcalan, ar Partiya Karkerên Kurdistan (PKK), lazhadegoù Saddam Hussein, brezel ar Pleg-mor (*Operation Desert Storm*), ar sikour degaset gant ar Gurded enep Saddam Hussein, ur Rannvro Kurd emren en Irak 1991, emzalc'h Turkia e-keñver ar Gurded, hini ken fall all Bro-Iran, ar Stad Islamat, he zorfedoù ha lodenn ar Gurded er stourm enep dezhañ, saviad ar Gurded e Bro-Siria...). Ur bern titouroù resis ha dielfennadurioù.

Echuiñ a ra al levr gant ur pezh pik goulennata : « *Quel avenir pour le Kurdistan ?* ».

Un toullad stagadennoù a zeu da-heul : ur pennad a-zivout ar yezh, unan war ar banniel hag ar gouel broadel, testenn ar c'han broadel, ur pennad diwarbenn Olivier Le Clainche, “Kendal Breizh”, stourmer breizhat aet d'en em gannañ gant ar Gurded enep ar Stad Islamat ha bet lazhed d'an 9 a viz C'hwevrer 2018, ul levr lenn-nadur hag ul listenn filmoù.

Kavet 'm eus al levr un tamm foutouilhek abalamour d'an titouroù stank ha niverus diaes da heuliañ a-wechoù. Dedennus-kenañ ivez abalamour d'an

titouroù-se, resis-tre el lodenn ziwezhañ. Da vezañ lennet evit kompren gwelloc'h stourm ar Gurded.

Ober a rin ma rebechoù boas da levrioù *Yoran*. Kalz skeudennoù, gwir eo, met e gwenn ha du dispis peurliesañ. An hegazusañ eo pa vez klasket deskrivañ livioù ur banniel gant ur skeudenn e gwenn ha du. Diaes-tre eo lenn ar c'hartennoù ivez. N'eo ket dreist an adlenn alies. Skouerioù fentus : el levrenn gentañ p.242 « *Les principautés kurdes connaissent [...] une rivalité entre eux* » p.177 ; en eil levrenn « *Le lendemain il tente de s'échapper, habillé en femme voilée. Les chaussures des hommes sous sa robe le trahissent* » (pet e oant dindan ar sae ?).


Daoust da stumm un tamm digempenn al levrioù, ez eo dedennus-kaer dastumad istorel *Yoran* a-zivout ar pobloù gwasket. Degas a ra gouiziegezh ha dielfennadurioù. Tuet eo, evel-just, peogwir ez eo ur “savboent” met pouezus abalamour da se ivez... Hag-eñ ez eus eus un istor objektivel ? Ar retañ eo e vefe diazezet an dielfennadur war fedoù ha dielloù gwiriadus.

PETRA NEVEZ ?



**Magali BARON,
Emmanuel PASTORI,
Herve LATIMIER &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

**An enezenn gevrinus,
lodenn 1, Peñseidi
an oabl,
gant Jules Verne,
Al Liamm,
290 pajenn, 14€**



Setu mouezhioù ankeniet o tasseniñ a-us d'ar Mor Habask : re veajourien o klask mestroniañ o baloñs gwallgaset ha roget gant ur barr-amzer spontus. Gant an *incipit* efedus-se omp taolet diouzhtu e-kreiz ar jeu gant an tudennoù, a-raok gouzout piv int zoken, na penaos en em gavont

er gwall blegenn-se. Tamm-ha-tamm e komprenomp emañ ar pemp paotr o terc'hel diouzh Richmond, sezizet gant ar Suou-rien, e-pad brezel an Digevredañ. Setu int bannet war ribl un enezenn, hep lojeiz na pourvezioù, hep gouzout dezhe pelec'h emaint ; gwashañ pezh zo, koue-

zhet eo er mor an hini gouiziekañ, a oa tonket da vezañ e penn ar beñseidi, an ijinour Cyrus Smith. Koulskoude eo ret dezhe sevel ur c'hamp, kavout boued, c'hwezhañ tan, ha klask anavezout al lec'h a zo deuet da vezañ o lod.

A-viskoazh e oa bet bamet an Naonedad Jules Verne gant mojenn Robinson Crusoe, ken-koulz ha gant ar mor hag al listri ; da goulz e vugaleaj e c'hoarie Robinson gant e vreur Paul war inizi gouez al Liger, e kenkiz e familh e Chantenay¹. E-barzh *An enezenn gevrinus* e pled Jules Verne, ur wech ouzhpenn, gant an istor-se. N'eo ket hep mousfent e veneg anezhañ en un doare fraezh ha sklaer, dre geñveriañ e oberenn gant hini e ziajentourien : « Bis-koazh ne voe ken dibourvez harozed faltaziet Daniel Defoe pe Wyss [...]. Pe neuze e tennent pourvezioù puilh eus o listri skoet, pe e greun, e loened, en ostilhoù, pe neuze e tegouezhe ur peñse bennak en aod hag a dalveze dezhe da vastañ da ezhomm kentañ ar vuhez. N'en em gavent ket diarm da vat dirak an natur. Aze avat, nep

benveg, nep rikoù. Diwar netra e rankjent d'ober pep tra ! »

Entanus eo gwelet penaos e tenn ar beñseidi gounid eus kement tra a vez roet dezhe gant an enezenn, da adsevel diwar an natur c'houez ur bed diouzh grad Mab-den. Ur forn, ur vilin, gwer, alumetez, nitroglikerin zoken e teuont a-benn d'ober, a-drugarez da alioù fur Cyrus Smith, « desket-bras » hag « ijinnet-kaer », a zo un dudenn arouezius eus gouiziegezh, youl ha kalon Mab-den. Ret eo derc'hel soñj e oa bet embannet romantoù Jules Verne gant *Le Magasin d'éducation et de récréation*, ur gelaouenn a oa he c'hefridi skignañ ar skiant en un doare dudius e-touez ar re yaou-ank. Plijus-kaer eo ar santimant ez eus traoù da zeskiñ da bep linenn ; cheñchet e vez zoken sell al lenner war ar bed, pa glasker dalc'hmat diskoachañ al lezennoù skiantel o vont en-dro a-dreñv ar pezh a weler. Ene ur bugel a adkaver eta en un taol-kont, unan a venn arvestiñ, kompren, hag ober e vad eus chal ar mor, eus drein ar gwez pe eus mein kavet war al leur.

M'eo gwir en deus klasket an aozer chom hep “truchañ”, dre lakaat e harozed dibourvez-

¹ Pascal Rannou, *La littérature bretonne de langue française*, p.132

kaer en natur c'houez, en deus a-hend-all roet muioc'h a sikour dezhe eget n'en doa graet Defoe da Robinson Crusoe. Rak adalek ar penn-kentañ e vez roet dezhe kavandenn ar re all. N'o deus ket da stourm da virout o denegezh – dre o barregezhioù hag o zemz-spered ez eont d'ober dija ur skeudenn eus ur seurt kevredigezh peurvut. Setu an tudennoù : ar c'helaouenner brezel Gedeon Spilett (prest da skrivañ kronikennoù dindan ar boledoù), ar martolod Pencroff (en deus redet an holl vorioù ha n'hell mui souezhañ dirak tra), ar c'hrennard Harbert Brown (barrek da anavezout ar plant), Cyrus Smith an ijinour, ha Nab, « hegredik a-wechoù, mousc'hoarzhus dalc'hmat, servijus ha mat » (ur sklav bet roet e frankiz dezhañ pell zo, chomet avat feal d'e vestr ha prest da vervel evitañ). N'int ket kement tud wir ha gwir harozed, tonket da skeudennaouiñ perzhioù dispar Mab-den hag e varregezh da vezañ trec'h war an natur. Cyrus Smith dreist-holl, sioul, difrom, oc'h arvestiñ ouzh ar gwirvoud hep lavaret grik, a-raok diskiñ e skiant d'ar re all sebezet hag abafet, a vir dalc'hmat emzalc'h an hini a oar.

Marteze eo ar fiziañs divrall-se e galloud Mab-den, « mestr ha perc'henn war an natur », a seblant bezañ un tamm diamzeriet. A-boan diskoachet ganto emaint en un enezenn e tilez ar pemp paotr an anv “peñseidi” evit hini “trevadennerien”. Plijus eo, gwir eo, ergerzhout gante torgennoù ha plegoù an enezenn, deskrivet pizh evel gant un douaroniour ampart, reiñ anvioù dezhe ha dont a-benn da stummañ ar binvioù kentañ, evel pa vefent an dud kentañ war an douar nevez-krouet. Met n'eo ket hep keuz e weler anezhe o treuzfurmiñ an endro, da skouer pa lakaont reier da darzhañ da izelaat live ul lenn. Hiziv e vefe marteze muioc'h a zisfiz ouzh o doare da azeuliñ an teknik hag an araokaat.


N'eus bet troet evit ar poent nemet al lodenn gentañ eus ar romant, « Peñseidi an oabl » ; kevrinus a-walc'h e chom evit ma vefe mall gant al lenner kregiñ gant an div lodenn all. Rak dalc'hmat e teu sinoù a seblant kemenn d'ar beñseidi emañ ur seurt Ragevezh a-du gante : sikouret e vezont meur a wech en un doare kevrinus. *An enezenn gevrinus* ac'h a d'ober un drilogiezh gant *Bugale ar*

c'habiten Grant hag 20 000 lev dindan vor ; a-walc'h e vo kemenn, hep diskuliañ re, e teuy war wel ul liamm ouzh an daou

romant-se. Da c'hortoz n'eus nemet saludiñ labour kalonek an troer...

MB

Morlenn,
gant Jorj Abherve-Gwegen,
An Alarc'h Embannadurioù,
327 pajenn, 13€



Kêrioù zo o deus awenet ar skrivagnerien. Barcelona, Napoli, Dulenn... Brest a zo unan anezho, muioc'h eget Roazhon marteze. Pierre Mac Orlan, Joseph Creac'h, Roparz Hemon, Jean Genet, Frank Bodenes, Fulup Lannuzel ha bremañ Jorj Abherve-Gwegen gant *Morlenn*, o deus dibabet Brest da leurenn. Intret eo porzh Penn-ar-Bed gant un aergelc'h barzhonius : ar melloù givrihouarn, eñvor an arsanaïlhoù, ar galeoù, ar bombezadegoù, meskaj ar poblañsoù hag ar yezhoù... piv 'oar. Daoust dezhi na vezañ ken chik ha cheuc'h ha Gwened, Roazhon, Naoned, pe Gemper, e sav ur gouloù boemus diouti. Alies mat e teu hiraezh dindan

pluenn ar skrivagnerien pa gomzont eus Brest.

Kement-se am eus santet o lenn *Morlenn*. Framet eo an dezrevell evel margodennoù rusian. Fiziañ a ra an daneveller eñvorennoù Anton, un den hag a oa bet enrollet gantañ pa oa oc'h ober war-dro ur radio lec'hel, ar Penfell Melody, d'ur paotr yaou-ank, Visant, hag a zo o sevel un dezenn. Tri gwiskad amzer evit lenn daramparch Brest, neuze, livet gant treizerien eñvorioù. Chom a ra damguzh ha damgevrinus an tremened, avat, en desped d'an testenioù, na pegen leal e vefent. Se zo kaoz moarvat e vez ken dudius deomp sellout war hol lerc'h evit klask kom-

pren danvez ur vuhez den. Gant Jorj Abherve-Gwegen e vez livet, diwar an amzer vremañ, tonkad an dud vunut eus ur brezel bed d'egile e Brest hag en trowardroioù, o kemer harp war un istor karantez etre daou baotr yaouank, Anton ha Julian. Tapet eo Julian gant an STO ha ret dezhañ mont da labourat da bell vro, tra ma vevomp gant Anton dindan bombezadegoù Brest. Hed hag elevez a oar lakaat an aozer gant e dudennou, dre han-

terouriezh an atersadennoù enrollet. N'eo ket gouiziekok'h egedomp, daoust dezhañ bezañ daneveller. Meur a diretenn a c'heller digeriñ o lenn *Morlenn*. Un teul sokial eo a-zivout tremened Brest. Un istor karantez heñvelreviat tragek eo ivez, mesket gant prederiadennoù diwar-benn an treuzkas, an eñvor, ha sekred dreistdiraez kalon Mab-den. Un taol-kaer evit ur romant kentañ.

MbdB

**Mont gant an hentoù,
Eus Porzhig da
vMikêl Groñvel,
gant Herve ar Gall,
An Alarc'h Embannadurioù,
118 pajenn, 8€**



Da-heul Herve Gouedard, Jorj-Abherve Gwegen, Louis Leclerc, Franzez Vallée, Youenn Troal, peotramant Nicolas Bouver, Heinrich Böll hag Herve Jaouen, e vez bouetet, dalc'hmat, dre lennegezhioù ar bed, ur genad dilorc'h ha neket dilufr : hini ar c'harnedoù beaj ma vleugn an eñvorennoù buhez, pell pe dost. El levrioù-se e vez kontet emgavioù gwir gant tadoù dibar, e lec'hioù divoutin, advuhezet gant eñvor, ijin ha kizi-

digezh an aozer. Ar wirvoudelezh zangorel-se a gavan eus an dudi-usañ. Deskiñ gant ar reiz hag ar galon war ar memes tro, sed a vez kinniget ganto. Plijadur ha boued spered.

Kement-se am eus santet o lenn *Mont gant an hentoù, Eus Porzhig da vMikêl Groñvel*. Ur gwir gonter zo eus Herve ar Gall, gant furnez ha fent, daoust dezhañ bezañ kriz gwechoù zo. Kriz pe didro, evit lavarout gwir. Kregiñ a ra gant un destenn

verr ma weler parezianiz Iliz Porzhig o tifaragouellañ war an diri riellet. Un deraouenn gwall azonus eus ur gevredigezh oc'h horellañ war he diazezoù. Abadennoù pesketa gant Pilon, an den kozh e bav koad, hag abadennoù chaseal didrugarez, war-lerc'h razed pe lapined, a genloder gant an aozer da c'houde. Amzer ar bugaleaj hag ar yaouankiz, ma vever nep buhezad en e leuned.


Danevelloù istorel a zo bet leurennet ivez e dastumad lies-seurt Herve ar Gall. Istorioù gwir pe wiroc'h, bet adsavet diwar dielloù ar c'horn-bro. Ober a reer anaoudegezh gant Loeiza Behereg ha Pêr Bienvenu da vare ar Bonedoù Ruz e Groñvel. Ambroug a reomp ur vandennad gouerien fuloret betek kastell ur bourc'hiz fallakr. Un tammig tostoc'h ouzhomp e veajer e-ser Anne-Françoise a Geslin hag he fried disuj e 1772, pa « embannas he seizh seurt ruz d'ar bed-holl ». E-kreiz al levr eo bet lec'hiet *Mont gant an hentoù*, bet lakaet da ditl an dastumad. Istor fromus ur Yann seitek bet kaset d'an talbenn eo, e-pad ar c'hentañ brezel bed. Hag eñ drailhet naet dindan an obuzioù. Herve ar Gall a ya d'ar

pep retañ, hep lourennañ. Soñjet em eus e berdroioù c'hwerv Jakez Riou.

Bed ar brezhoneg a vez pletet gantañ ivez. Penaos tremen hep bezañ feuket gant emzalc'h strizhsperedet skolaerien ar republik o tinac'h groñs mont e-barzh ar c'hantin-kêr ouzh bugale skol Diwan Kemperle : « C'hwi zo skolaerien ur skol brevez n'ho peus ket droed, hervez lezenn, da zont c'hwi da zebrñ en ur c'hantin publik... ». Klozet eo al levr gant ur pennad anvet « Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh », ma tispleg Herve ar Gall penaos en deus kavet hent ar brezhoneg. Sonadeg Alan Stivell en Olympia a voe e biler Itron Varia... Goude bezañ azeulet Johnny Halliday !

MbdB

Dindan ar bili, an traezh,
gant Filip Oillo,
Al Liamm,
286 pajenn, 14€



Un istor a garantez eo. Un devezh, Youenn, penndudenn ar romant-mañ a zo pedet da goaniañ e ti mignoned dezhañ. E-unan emañ abaoe bloavezhioù, abaoe m'eo aet kuit e wreg digantañ gant ur paotr all. Bevet en deus traoù gant merc'hed all, met hini ebet eus an darempredoù-se n'eo padet pell.

Mont a ra neuze da brenañ bleunioù da brofañ d'e ostizien. Ur plac'h koant-meurbet a zo dija eno, ha setu ar big da gregiñ en e skouarn...

Pebezh souezhadenn da c'houde pa wel Youenn eo bet kouviet ar goantenn da zebriñ ivez e ti e vignoned ! Setu eñ sorc'hennet gant ar vaouez yaouank, Montse hec'h anv. He mouezh, he blev, he c'hoarzh, pep tra enni a lak e galon da dridal. Ur skiantourez vrudet eo, a orin eus Bro-Gatalonia.

Deuet eo da Vreizh evit studiañ bezhin ar vro, met dizale e ranko distreiñ d'he skol-veur.

Chom a reont en darempred memes tra. Bemdez e kas Youenn keloù dezhi dre bostel, hag un deiz bennak e tiviz a-daol-trumm ober an hent evit mont da zisklêriañ e garantez dezhi.

N'en doa ket kredet en ober en a-raok, abalamour d'an diforc'h a oad a zo etreze. Ugent vloaz koshoc'h eo Youenn memes tra. Ouzhpenn-se en em gav divalav a-walc'h, re dev ha disto e benn. Ha pa vezer abaf ne vez ket aes boulc'hañ an darempred kentañ...

Un degemer a-feson a gavo e Cadaqués, porzh-mor bihan a Gatalonia. Peseurt hini ? Ha dont a raio a-benn ar paotr da vezañ karet gant ar fulenn emañ e holl soñjoù troet daveti ?

Ne lakin ket amañ ho plijadur da drenkañ en ur diskuliañ fin an istor.

Ul levr skrivet brav eo, hag ouzhpenn un istor a garantez a vo kavet gant al lenner(ez).

Youenn, an haroz, a zo deneltre. Deskrivet e vez pizh e dri-vliadoù, an douetañs en deus a-wechoù.

An tudennoù a zo deskrivet brav ivez, hag al lodenn eus ar romant a c'hoarvez e Katalonia a zo un digarez da daolenniñ ar vro-se, ha komz eus ar pezh a ra hec'h identelezh dibar. Kudennoù ar vro a vez meneget ivez gant ar skrivagner. Lanv an douristed o tarzhañ bep bloaz a zo evel un heklev eus ar pezh a c'hoarvez e Breizh ivez.


Meur a wech e vo komzet gant ar skrivagner eus ar c'hudennoù a vez degaset gant an douristed. Alamaned, Saozon, Gallaoued ha Breizhiz zoken a dap o fegement, en abeg d'o disablanted e-keñver pobl ha sevenadur Katalonia. Peadra da vagañ ar preder neuze.

Mousfent a gaver ivez diwar-benn Breizh, he hengoun hag he sevenadur.

Ul levr mat-tre neuze, daoust d'an danvez a c'haller kavout dister er penn-kentañ. N'eo ket tamm ebet a-benn ar fin, hag aliañ a ran pep lenner(ez) da lenn anezhañ a-raok mont da vakañsiñ en estrenvro, kuit da vezañ gwelet evel un tourist ouzhpenn.

EP

Fahrenheit 451,
gant Ray Bradbury,
brezhoneg gant Alan Martel,
An Alarc'h Embannadurioù,
236 pajenn, 11€



Fahrenheit 451 a zo trede levrenn un trifezh brudet holl. *Brave new world*, gant Huxley, embannet e 1932 ; *1984*, gant

George Orwell, embannet e 1949 ; hag erfin romant Ray Bradbury, bet embannet e 1953, pa oa strizhder spered Mc Carthy

oc'h ober e reuz er Stadoù-Unanet. An tri levr-se n'int ket koshaet tamm ebet, ha souezhet on bet, oc'h adlenn *Fahrenheit 451* e brezhoneg, a-drugarez da Alan Martel, o stadañ pegen gwir e oa ar pezh en doa diouganet an aozer, nemet n'eus ket bet ezhomm a boliserien evit gwalc'hiñ empenn an dud a chom peget eurvezhioù-pad, dre gaer, ouzh o skrammoù¹. Trawalc'h eo bet gant *marketing* an arc'hant bras. Hevelep amva am eus adkavet e filmoù berr ar stirad *Black Mirror*. En unan anezho ez eus ur seurt eilad eus ar c'hi-kevnid lazher a gas warlerc'h Montag e romant Bradbury. N'eus ket kalz a dekno-logiezh, koulskoude, e levr Bradbury. N'eo ket un distopiezh evel *Dune* da skouer. En hor bed deomp-ni omp splujet, ken e vefe reishoc'h komz eus ur flemm-skrid eget eus ur romant skiant-faltazi.

Fahrenheit 451 : ar wrez resis ma kuzum ar paper. Montag, ar benndudenn, a zo e vicher c'hwezhañ an tan el levraouegoù kuzh. Distrujañ a ra al levrioù ha lazhañ a ra o ferc'henn, diouzh ret. Rak berzet eo lenn


1 Lennit arnod-skrid Michel Desmurget : *La fabrique du crétin digital*. Seuil, 2019.

ha prederiañ. Diboell ha didalvoud eo ar pezh a lenner el levrioù ! Dleet eo d'an holl kavout o seizh plijadur dirak mogerioù skrammoù. Kejañ a ra Montag dre zegouezh gant ur grennardez, p'edo war hent an distro goude e zevezh labour. Ar plac'h yaouank-se a seblant bezañ kavet ur seurt sederoni. Dieub eo he spered. Met un deiz ez a diwar wel, steuziet...

A-drugarez dezhi e tigor daoulagad Montag. Met hepdale e tro ar chascour da breizh... En em gavout a ra Montag gant un toulladig rezistanted strewet er c'hoadoù. Kavet o deus an tu da virout ouzh gouiziegezh Marden da vont da get. N'o deus ket aon rak ar galloud ken. Desket o deus pep a bennoberenn disheñvel dre an eñvor. Ezhomm ebet eus skor danvezel ar paper ken. Trawalc'h gant nerzh ar spered. Ur gentel wellwelus, ma 'z eus. Betek re, marteze...

Mb dB

Breizh Aktu, 1970-1980,
gant Goulc'han Kervella,
Al Lanv,
176 pajenn, 12€



Un dro-ouesk eo ar romant berr-mañ. Savet eo bet diwar ur pezh-c'hoari memes anv skrivet e 2003 gant Goulc'han Kervella. Un azasadur n'eo ken neuze, met brav eo deuet gant an aozer. Rak ne oa ket ken aes-se tremen eus un eil genad d'egile hep diouennañ chalm, framm ha danvez ar stumm orin. Kemer a ra harp an aozer war emgav e ziv benndudenn, un vaouez kozh, an dimezell Karadeg, hag ur c'haner yaouank, Jakou an Dall, danvez un emsaver ennañ. E-barzh “daou-loan” Jakou o deus tro da foetañ bro asambles. Peadra da advevañ ar stourmoù sokial ha politikel a voe ken fonnus e Breizh etre 1970 ha 1980. Koll he fenn a ra an hini gozh. Krediñ a ra dezhi he deus bet bugale hag o doa kemeret perzh e stourmoù heverkañ ar prantad-hont : Arsailh isprefeti


Montroulez gant Gourvenneg ha paotred al legumaj, harz labour *Le Joint Français*, kreizenn Plogoñv, brezel al laezh, Diwan... Broudet eo bet ar stourmoù-se gant arzourien mennet-start, ha war meur a dachenn. Filmoù gant Vautier ; kanaouennoù gant Glenmor, Gwernig, Gweltaz ar Fur, Stivell, Maripol, Mona Jaouen... ; Pezhioù-c'hoari : hini Paol Keineg, bet leurennet gant *Strollad ar Vro Bagan*, ar Bodedoù ruz, en doa graet berzh bras. Ur prantad a bouez e voe, ma savas ar Vretoned o chouk. Daoust d'an darvoudoù bezañ kriz ha rust, peurvuiañ, e c'hoarzh al lenner alies, ken em eus soñjet, meur a wech, e pezhioù-c'hoari fentus Jakez Riou ha Youenn Drezen. Spered didro ar bobl ha spered ar c'hoariva war ar memes tro.

Perak adembann ur pezh-c'hoari kozh e stumm ur romant hiziv an deiz ? Evit derc'hel soñj eus ar stourmoù hag eus ar stourmerien, moarvat. Rak an ezhomm stourm ne gosha ket. Ma c'helljen-me kanañ laouen... Ar re yaouank ha n'o deus ket bev et ar mareoù birvidik-se a zo en arvar da goll o breizhadelezh hiziv an deiz, ha dont da vezañ estrañjourien en o bro. Kendonianñ a ra romant Goulc'han Kervella gant spered *Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh* pe

gant levrioù Charlie Grall bet embannet gant *Al Lanv* n'eus ket pell, a-zivout Remont Delaporte pe Martial Ménard. Poent eo adkavout ur spered dieub, war roudoù Breizhiz kar-o-yezh ha kar-o-bro, rak n'eus bet gounezet tra ebet hep en em gannañ er vro-mañ. *Breizh Aktu* zo anezhañ ul levr da voueta ar prederiadennoù, evit ma tihuno an emskiant breizhek a zo deuet da vezañ re wan e lutig hiziv an deiz.

MbdB

Lilah hag ar Golem,
gant R. J. Kerno,
Keit Vimp Bev,
56 pajenn, 6€



Un iskis a romant berr eo *Lilah hag ar Golem*, mesket ennañ mojenn gozh ar Golem hag istor ur grennardez ha n'emañ ket en he bleud gant an dud. Gouest eo d'ober he zreuz er vuhez koulskoude. Heñvel eo an danevell-mañ ouzh skritur ur senario, ken lamm-dilamm ez eer war-raok. N'eo ket displijus koulskoude, gant ma plego al lenner ouzh red an darvoudoù hep chipotal. Ur meni barzho-

niezh a sav diouzh ar mod-se da gontañ hep klask tro.

E Polonia emaomp. Lilah a ra war-dro an ti. Emañ he zad o seniñ violoñs e kêrioù pell, warlerc'h e vara. He mamm a chom war he gwele gant un diwas-kadenn hirbadus. Ur garg gwall bounner eo war chouk ur grennardez ! Tristik eo ar vuhez. Klevout a ra en he fenn komzoù ar Golem ledet e kev he zi. Tizhout a ra dihuniñ anezhañ. Hemañ a warez anezhi en ur

mod dizampart, digempouez ha dall, ken e vez lakaet da gousket adarre gant Lilah... Daoust ha n'eus nemet un arouez anezhañ ? Arouez an aon, ar veñjañs, ar feulster diroll a zo damgousket e kalon Mab-den ? E c'hellfe bezañ pa selaouer komzoù fur ar rabbi er vered m'eo bet douaret ar Golem gant Lilah : « Komzit gant ar Golem ma skoazell ac'hanout da gemer un disentez,

met eñ zo perzh eus an Henboaz, eus ar bed all... Ret eo deoc'h ivez komz gant ar re vev. » Ha c'hoazh : « an dristidigezh zo ur si. » Ur mignon a gav Lilah : Woj. Un tammig gouez eo, met birvilh zo ennañ. Gantañ e tesk Lilah doareoù ar gwir vuhez... Sevel a ra he c'hein, goustadik. Met n'emañ ket e penn an hent c'hoazh.

MbdB

**Lennegezh Vreizh
o tiwanañ,
levrenn II,**
gant Pierrette Kermoal,
Embannadurioù Aber,
252 bajenn, 13€



Gant an eil levrenn-mañ e kendalc'h Pierrette Kermoal gant an erv he doa boulc'het o tisplegañ penaos e oa digloret da vat ar pezh a c'heller envel lennegezh Vreizh. Pledañ a ra, ar wech-mañ, gant skrivagnerien *Gwalarn*. En-dro d'ar gelaouenn lennegel-se, a badas eus 1925 betek 1944, e voe lusket « ur vuhez kefredel na oa bet bis-koazh, ur birvilh sebezus bet ganet diouzh ar c'hrouiñ, len-

negel hag arzel ». Evit ar wech kentañ e voe embannet ur pal sklaer, gant meiz ha youl : « krouiñ e brezhoneg ul lennegezh a live gant kement lennegezh er bed ».

Ar re o deus lennet levrioù skridvarnerezh Pierrette Kermoal ne vint ket souezhet gant he mennozhioù-stur. Adlakaat a ra anezho war ar stern, nemet e sav he dezrann diwar pevar

maen-korn, kement ha soliañ ur seurt testamant speredel.

Da gentañ, galvidigezh ha stummadur penndudennoù ar rummad yaouank (Drezen, Riou, Kerrien) : lorc'h, c'hoant, herder ha mignoniezh... Ur bed nevez o taeañ bed kozh ar Gorsedd digor¹. Reiñ a ra da lenn ar pennad brudet bet gouestlet gant Youenn Drezen d'e vignon Jakez Riou goude e varv.

Da eil, nerzh al lavar krouus, studiet diwar teir oberenn ha tri savboent klokaus : *Ar Follez Yaouank*, *Mari Vorgan* hag *Ar pezh aour*². Dre al lavar eo, al lavar krouer ha neket marmouzer, e tizher reiñ buhez d'ar pezh a zo bet treuzkaset deomp, evit sevel un dazont en ur dalañ ouzh an dianav, e-giz e parabolenn an talantoù...

Da drede, diskar keal ar salver, a-dreuz div bennoberenn : *Lazhadeg unmab Aife* ha *Nominoe-Oe*³. Arabat gortoz ur salver, da bep hini ac'hanomp d'ober e lod : « rak Nominoe zo henozh kement Breizhad kalonek en deus argadet evit ar Vro ».

Hag erfin : an arz el lennegezh, diwar zielfennadur soutil

1 Jakez Riou

2 Meavenn ha Roparz Hemon.

3 Roparz Hemon ha Jakez Riou.

Itron Varia Garmez. Klozañ a ra Pierrette Kermoal gant barzhonég Roparz Hemon, *Ar Porzh*, ma tiskouez adarre e chom bev ha divarvel ar bed a garomp dre nerzh ar varzhoniezh hag ar gened. « Mojenn a gan a van » a skrive Omar C'hayyam, mil bloaz zo. En un dianskrid berr e taol an aozerezh ur sell yaus war hol lennegezh a-vremañ, liesseurt ha pinvidik, dre vras, ken e c'heller « diogeliñ ez eus ur sellad breizhat war ar bed, eztaolet dre al lavar nevez krouet gant hor skrivagnerion ». Rentañ a ra enor, en o zouez, da Ronan Huon, a zo « ken pinvidik, ken hoalus, e zastumad kevellennoù *An irin glas* ».

MbdB

Chal ha Dichal,
gant Roperzh ar Mason,
Skeudennaouet gant
X. de Langlais,
Mouladurioù Hor Yezh,
102 bajenn, 15€



Ul levr barzhonegoù an hini eo. Embannet e oa bet evit ar wech kentañ e 1943, met ar barzhonegoù a oa bet skrivet etre 1931 ha 1939.

Skrivet eo e Gwenedeg, nevesaet ar yezh un tamm hervez an embanner.

Ofisour ar morlu e oa an oberour, n'eo ket souezh neuze ma vo kavet gant al lenner kalz a varzhonegoù awenet gant ar mor, al listri hag ar broioù estren darempredet gant ar skrivagner. Buhez kriz ha kalet an dud a vor, penaos emañ micher ar var-toloded o cheñch peogwir e vez dilezet tamm-ha-tamm ar bigi dre lien, ha pegen plijus eo distreiñ d'ar gêr evit ar martolod a vo kavet ivez.

Un den a feiz kristen e oa Roperzh ar Mason, ha levezon ar relijion a santer a-hed al levr, war ton an dristidigezh

a-wechoù evel e-barzh « Marv eo », hag a-wechoù war ton al levenez « Alleluia ! ».

Un den kizidik e oa Roperzh ar Mason, war dachenn ar barzhonegoù bepred. Lakaat a ra war wel ar garantez a vag evit e wreg hag e vugale, ar pezh ne oa ket stank er bloavezhioù-se da'm meno.

Diskouez a ra ivez e drivliadoù e-keñver an dud all, evel da skouer « Nozvezh ar c'heneil adkavet » pa vez kaoz eus un emgav etre daou vignon kozh. Krishoc'h e teu da vezañ pa vez kontet gantañ planedenn griz ur martolod beuzet e-barzh « An den kouezhet er mor ».

Kizidik eo ar skrivagner, met ma c'hoarvez dezhañ alies reiñ meuleudi da lec'hioù bravmeurbet eus ar broioù all e skriv ivez n'eus mann ebet par da vrapentez e vro . « Kan ar goedeg »

a zo unan eus ar barzhonegoù o deus souezhet ac'hanon peogwir e vez santet ennañ gant al lenner ur garantez divent evit an natur hag he braventez.


Skeudennaouet eo an oberenn gant koadengravadurioù aozet gant Xavier de Langlais, unan eus arzourien strollad *Ar Seiz Breur* evel-just. Kavet e vo ul listenn gerioù e fin al levr, ha gras am eus kavet d'an dra-se, dre ma n'on ket boaz da lenn gwenedeg.

Pismigus e vin bremañ un tammig bihan peogwir e vank

un dra, da'm meno d'an nebeutañ. Da'm soñj e vije bet mat ouzhpennañ pe ur bladenn-arc'hant, gant ar barzhonegoù engravet enni, pe ul liamm o kas d'ul lec'hienn internet e-lec'h ma vije posupl kaout ar barzhonegoù lennet gant gwenedourion, kement ha kaout blaz brezhoneg Bro-Gwened. Siwazh n'eus ket, met da'm soñj e vefe fiskal en ober.

EP

**Légendes Celtes,
Bretagne, Pays de
Galles, Irlande, Écosse,
Cornouailles,**
gant Erwan Chartier-
Le Floc'h ha Genkis
Genkkis,
Yoran embanner,
125 pajenn, 19€



C'hwec'h mojenn vrudet a vez kontet el levr-mañ gant Erwan Chartier-Le Floc'h (*Les deux dragons, Le prince Pwyll, Branwenn fille de Llyr, La submersion de Keris, Konomor le maudit, Cuc'hulainn, le grand héros de l'Irlande*). Kinnig a ra a-wechoù un doare da gontañ an traoù disheñvel diouzh ar pezh a

lenner pe a glever da gustum evit mojennoù zo evel hini liñvadenn Kêr-Is da skouer : kemeret e vez plas Sant Gwenole gant Sant Kaourintin ha ne laer ket ar priñs ruz alc'hwez ar skluzioù en degouezh boas.

Plijus eo an istorioù da lenn ha deuet eo a-benn an aozer da virout blaz ar mojennoù kozh en

e destennoù. Skeudennaouet brav eo al levr gant Genkis Genkkis ha kinniget ken brav all.


E fin al levr e c’heller lenn pennadoù bihan a-zivout al loened a gaver e mojennoù ar Gelted. En o zouez ar c’hi (p.118). Souezhet on bet o lenn « *Tangi, signifie littéralement*

le “chien chaud”... » Ne ouien ket e talvezze Tangi kement ha “hot-dog” ha “tan” kement ha “tomm”.

Seurt fent (diratozh ?) ne cheñch ket ar blijadur em eus bet o follennata al levr evit an tresadennoù ha da lenn ar mojennoù. Ul levr da lenn ha da brofañ.

HL

Le Monde des Druides,
gant Morvan Coarer,
Yoran embanner,
240 pajenn, 12€



Souezhus em eus kavet levr Morvan Coarer, /\ Ulatocantos. Prantadoù dedennus, prantadoù enoeüs, rak re “deologel” pe ezoterek evel ma karer, kavet e vez ivez tagadennoù feuls enep kredennoù all na ziskouezont ket un digoradur a spered.

A-raok mont pelloc’h em eus c’hoant da lâret en deus anv an aozer lakaet ac’hanon da zistreñ war-du ar bloavezhioù 60, e ti ma zud-kozh, ma selaoue ma zad-kozh an abadennoù brezhonek er post bihan bep Sul.

Heuliet e oa an abadennoù-se gant re all anvet *Bretagne, miroir à deux faces par Edmond Coarer Kalondan et Gwezenn Dana* ma ’m eus soñj mat. Tud Morvan Coarer.

Plijet o deus an daou chabistr kentañ din. Lenn a reer da gentañ un dezenn diwar-benn orin Kelted Preden hag Iwerzhon (Kelted ar C’hornôg). Deut e vefent eus Anatolia dre Vro-Spagn hag o defent aloubet goude kornôg Europa hervez un ahel Gwalarn-Gevred. En o

zouez nemetken e kaver Drouized (p.30). Souezhet e c'heller bezañ met reiñ a ra an aozer arguzennoù evit magañ un dael. An eil chabistr, *Du bardisme et du druidisme*, a zegas ur sell war drouizelezh Preden. Kompren a reer plas pouezus Iolo Morganwg. Evit an aozer e vefe ret studiañ lennegezh kozh Bro-Gembre ken pizh hag hini Iwerzhon e-keñver levezon an drouizelezh. Adalek an trede chabistr, *Les triades ne sont pas toutes chinoises*, em eus kavet kalz diaesoc'h da lenn ha da gompren. Diazezet eo war an 46 triadenn "teologel" bet tennet eus Barddas Iolo Morganwg gant Gorsedd Beirdd Ynys Prydain a gaver meur a droidigezh anezho er stagadennoù. Er chabistroù 4 betek 10 e studier tachennnoù eus speredelezh ar Gelted : *Réincarnation et métempsycose chez les Celtes ; Lamatrière dans la métaphysique celtique ; Âme ou esprit ? ; Polythéisme versus monisme, la fausse opposition ; La notion du temps chez les Celtes ; Les trois sentes du sanglier ; Démarche individuelle et sentier collectif*. Anzav a ra bezañ en em gollet e milendall an arroudennoù hag ar prederiadennoù. Diaezamant em

eus o krediñ er frazenn a gaver p.162 : « ... le Druidisme est Tolérance, Compassion, Écologie... » pa lennan an dagadenn leun a gasoni hag a ziouiziegezh a-zivout ar selloù disheñvel a gaver er bed ar yuzev-ha-kristen, p.133 peurgetket. Ur skouer eus ar fed e c'heller bezañ dallet gant ar rakvarnioù : « *Mais entre cette tragique date [61 GJK] qui vit le massacre de l'élite des druides de l'île de Bretagne et la christianisation avérée du pays de Galles, plus de 400 ans plus tard...* » (p.38). Ma ne fazian ket, e kas se da eil hanter ar ^{V^{vet}} kantved. Klotañ a ra kalz muioc'h gant ar pezh a lenner e levr Olivier Loyer, *Les chrétientés celtiques*, embannet gant Terre de Brume (p.15) ; « *La Grande-Bretagne avait été progressivement christianisée dès la fin du II^e siècle.* »

O lenn rakskrid /\ Morgan, Drouiz Meur Breudeuriez Drouized, Barzhed hag Ovizien Breizh, em eus kredet kompren e oa disheñvel sell ar skourr-mañ diouzh hini ar Gredenn Geltiek Hollvedel. Kalz digoroc'h ha ket ken "teologel" ha strizhkredennour. Kavout a ran se kalz gwelloc'h hag emsavusoc'h.

HL

**Liberté, égalité...
déportées !,
Thann 1914,**
gant Anne-Marie Hils,
Yoran embanner,
256 pajenn, 13€



Meneget e oa bet *Histoire d'Alsace, Le point de vue Alsacien* gant François Waag, Yoran embanner, e niverenn 401 *Al Liamm* (Du-Kerzu 2013, p.109). Dont a ra testeni Anne-Martie Hils da reiñ buhez d'ar pezh a lenner e chabistr *Du malaise au calvaire : le premier vingtième siècle alsacien (1919-1945)* eus levr François Waag. Ar pezh a zo bet bevet gant an aozerez a dremen e 1914-1915 el lodenn eus Elzas bet aloubet gant armeoù Frañs e penn-kentañ ar brezel hag er c'hampoù-bac'h ma voe kaset Elzasiz zo betek he “distro” da Alamagn o tremen dre Vro-Suis. Rannet 'oa bet dija an dud e peder rann hervez o orin etnek evel ma voe goude 1918 e-pad ur pennad : Elzasiz “pur”, hanter Elzasiz ; Alamaned a orin pe eus ur vro bet chomet neptu pe kevredet gant Alamagn. Skarzhet e voe

diouzh o bro izili an eil pe an trede rummad. Eus ar rummad-se e oa Anne-Marie Hils. Ganet e oa bet Anne-Marie Hils e Kolmar e 1887, Elzasadez e oa he mamm ; dont a rae he zad eus ar Schwarzwald. Marvet eo e Stuttgart e 1966. E Thann e oa deuet familh Karl Hils da chom e 1886 pa oa bet goulennet digantañ labourat war chanter kempenn iliz ar gêr. Ur c'hizeller brudet e oa. Un deizlevr eo *Die Franzosen im Ober-Elsaß ! Meine Kriegerlebnisse in Thann : und als Geisel in Frankreich*. Embannet 'oa bet un niver bihan a skouerennoù anezhañ e 1918 c'hoazh, hep ober berzh. Heuliañ a reer buhez Anne-Marie. Diskouez a ra an traoù en un doare disheñvel-kaer diouzh sell ofisiel Frañs, evel-just. Feulster, dismegañs, droukziforc'h, kenskoazell alies met flatrerezh ken alies all.

Kasoni spontus ar C'hallaoued pa dremen ar brizonidi d'ul lec'h d'egile e-pad o frantad bac'hadur. E fin al levr e kaver ur goude-skrid gant ar familh hag un nebeud stagadennoù a-berzh an troer. Un toullad anezho diwar-benn Karl Hils hag an doare m'eo bet "ankouaet" e Thann. E raskrid ar familh e kaver ur frazenn a ziskouez e tleer bepred bezañ aketus pa implijer un testeni rak emzalc'hioù pe mennozhioù a c'hell

cheñch e-kerzh ur vuhez : « *Au début nous avons été réticents à donner notre accord pour la publication d'une traduction, car la langue patriotique d'Anna Hils n'est plus du tout d'actualité de nos jours.* » Ret eo lakaat pep tra en e endro, en e amzer. Un diell istorel prizius eo testeni Anna/Anne-Marie Hils. Danvez evit magañ labour an istorourien.

HL



hor YEZH

War roudoù gwerz
Loeiz ar Ravalleg [4/4]

Treuzkas pe memor ?

Ag ar c'heltiek kozh
d'an henvrezhoneg e Bro Naoned

Un nebeud traoù lavaret din
gwechall gant un den eus Plouenan

Notennoù yezhouriezh (2)

Buhez vrezhoneg Paol-Aorilian
gant ar Breur Bernard ar Spered
Santel, tennet diouzh e zDoctrinal

Dafar evit un antologiezh vrezhoneg
eus ar gwerzioù istorel koshañ

306-307
Mezheven-
Gwengolo 2021

Riwal HUON & Tudual HUON

Aet eo preder Myriam Guillevic war an treuzkas. Petra eo an “tradition” ? Talvezout a ra treuzkas, eus an amzer gozh d’an amzer a-vremañ. Met cheñch a ra dre ma tremen an amzer : bleud gwinizh du ar c’hrapouezh n’eus ket ar memes blaz gantañ ha gwechall sur a-walc’h. Ne vez ket fardet ken ar c’hrapouezh gant lard dous war an oaled, farset e vezont gant meur a dra bremañ. « Gant ar cheñchamantoù-se e chom bev ar c’hrapouezh gwinizh-du. » Abaoe 1931 e implijer ar ger “hengoun” diwar kinnig Fransez Vallée : *hen* a sinifi kozh hag ar ger *koun* a sinifi memor ha soñj ebet da dreuzkas eme Myriam Guillevic. Diskouez a ra kement-se

> Hor Yezh (306-307)

Un tamm dale a zo gant **Hor Yezh** ar wech-mañ eme Herve Bihan evit abegoù teknel.

En niverenn-mañ e talc’h Pierre-Yves Kersulec gant ur pevare pennad diwar-benn gwerz Loeiz ar Ravalleg : lakaat a ra tal-ouzh-tal stummoù disheñvel ar ganaouenn bet dastumet e Bubri, Melran ha Kistinid.

tro-spered ur mare. Ober a ra-hi ur goulenn pouezus evidomp holl ; perak derc'hel soñj ?

War danvezioù muioc'h arbennik ez a Antoine Châtelier pa ra al liamm etre ar c'heltieg kozh hag an henvrezhoneg e Bro-Naoned. Ober a ra Fulup Lannuzel kinnigoù da dreñ e brezhoneg (p.39) gerioù a reomp gante bemdez-Doue : *réalité, réaliste, épidémie, pandémie*.

Ur studiadenenn ouzhpenn 45 pajenn enni a zo diwar zorn Herve Bihan diwar-benn *Ar breur Bernard ar Spered Santel hag e zoktrinal (1680-1688-1689)*. Furchet en deus da c'hoût

muioç'h war-bouez ar vourleien, ha lakaet un toullad notennoù yezh. Embannet e vez da-heul ar skrid « Hervez moulladenn 1689, an hini nemeti a chom lennus » (luc'heilennoù eus golo an doctrial a zo ivez). Emañ Herve Bihan en soñj kas war-raok ul labour da sevel un antologiezh vrezhoneg eus ar gwerzioù istorel koshañ : ha setu eñ krog e penn diwezhañ an niverenn-mañ gant *Gwerz lestr ar Porzh-Gwenn*, ur werz eus an XVIII^{vet} kantved bet dastumet e 1836.

RH

> Bro Nevez (160)



Kemer harp a ra Lois Kuter war sifroù Ofis Publik ar Bre-

zhoneg evit kinnig d'ar saoznegerien stad ar brezhoneg er skolioù e Breizh.

Anv zo ivez ganti eus *KelenOMP !, Breizh America, klask.com* hag ivez an aozadur *ELEN* a zo o stourm evit ma vije dalc'het da 100% a soubidigezh e katalaneg. Gouarnamant Spagn en deus divizet e ranke 25% eus ar c'hentelioù bout aozet e spagnoleg e Katalonia.

Gant Joshua Tyra ez eus anv eus embannadur nevez an *Hobbit*, bet lakaet e brezhoneg gant Alan Dipode tost da ugent vloaz zo bremañ. Joshua en

deus sikouret adwelet an embannadur nevez embannet gant *Evertime* e Bro-Skos.

Renablet en deus ivez ul lodenn eus al levrioù bet lakaet e brezhoneg diwar yezhoù all evel saozneg, sinaeg, rusianeg...

Titl pennad J.-P. Le Mat (niv 69) a zo : « *Rooted bretons and our diaspora* ».

E lodenn an dielloù e kaver ur pennad gant ar biologour J. Walter Fewks. Kontañ a ra e droiad e Rosko er bloavezh 1889.

25 albom sonerezh nevez a zo renablet ivez.

TH

> Pobl Vreizh (695-696)



Lenn a c'heller el lodenn vrezhonek ur pennad-kaoz gant Etienne Siberil (komzoù dastumet gant Herve ar Gall). Dedenet-bras eo bet a-viskoazh gant ar c'hoariva ha diplomet eo eus skol hollvrudet Jacques Le Coq e Pariz. Savet en deus ur strollad

c'hoariva nevez : *Ar Vroderezh Noz*.

Gant Paol ar Meur ez eus kaoz eus orin an delenn geltiek, benveg ar varzhed. « Pobl ar Vouzared o vont da get ? » a zo ur pennad bet savet gant Maelc'hen Laviec.

Herve Latimier en deus burutellet pevar levr nevez embannet : *Lili zo o c'hortoz Tadig an Nedeleg* gant Yael ar Gov, *War an hent* gant Jack Kerouac, *An enezenn gevrinus* gant Jules Verne ha *Na fur na foll* gant Mich Beyer.

Lenn a c'heller ivez un diverrañ eus niverenn 158 ar gelaouenn drimiziek *Al lanv*.

Le Peuple breton, niv. 696. Pennad Paol ar Meur en niverenn-mañ a bled gant an identelezh. Gant Maelc'hen Laviec ez eus kaoz eus stourm

Pobl ar Vouzared a-enep unvanadur Mab-den.

Kaoz a zo ivez eus efed drastus ar produñ alamandez er bed a-bezh. 10% eus an dour e Kalifornia da skouer a servij evit gounit alamandez.

Ur pennad a zo ivez diwar-benn ur c'hoari nevez : *Chrono-ludik*. Pal ar c'hoari : urzhiañ kartoù ma 'z eus darvoudoù istorel warno eus an hini koshañ d'an hini nevesañ.

> Al Lanv (159)



Evel kustum ez eo puilh ha liesseurt ar skridoù embannet en niverenn-mañ. Éamon Ó Ciosáin a gas ingal keloù eus Bro-Iwerzhon : pouez lobby al labourerien-douar hag int-i kon-

Tri levr a zo bet burutellet gant Herve Latimier : *Pik pe Vran* gant Fulup Lannuzel ; *Lizig, Priñsezig an dour* lakaet e brezhoneg unvan Bro-Gwened gant Daniel Doujet ha *Gwenneien an aotrou Skouarneg* lakaet e brezhoneg gant M. Kerrain.

Un diverrañ eus niverenn 449 *Al Liamm* a zo bet aozet ivez gant Morgan Tremel.

TH

trol d'an ekolojisted, kudenn al lojeiz.

Ar *Sinn Féin* a vo, marteze a-walc'h, ar strollad kreñvañ en dilennadegoù da zont hag evel-just ez eus anv eus kudenn Breizh-Veur hag hanternoz Iwerzhon. Pemp pajenn a zo gouestlet da Antoni Gaudi, adeiladour ha dreistweler (pennad savet gant Loeiz Gwilhou).

Derc'hel a ra Charlie Grall gant e bennadoù « Dielloù evit an istor ». En dro-mañ ez eus anv gantañ eus ar stourmerez Eva Forest. Stourmet he doa a-enep Franco ha goude-se e oa bet tost da emsaverien an ETA en Euskadi.

Herle Denez, bet kenlabourer d'*Al lanv* e penn-kentañ-tout a zo aet da Anaon e-doug miz

Here 2021, setu ma kaver un toullad skridoù en e eñvor. Youenn Kervalan en deus savet ur skrid hir ha fromus diwar-benn e vreur Lanig aet da Anaon e 2021.

Un atersadenn hir a c'heller lenn ivez diwar-benn ur framm nevez savet : *Kenurzhierzh Labourerien ha labourerezed ar Brezhoneg* (KLBS). Ur pennad-kaoz all a zo ivez gant Armel an Hejer bet aozet gantañ un emgav sonerezh Breizh e Ti ar Vro Kemper.

Peder fajenn a zo bet gouestlet d'ur pennad gant Charlie Grall diwar-benn Gouel al Levrioù e Karaez e 2021.

Daou bennad puilh an titour enne a zo bet skrivet gant Iwan Gwegan : « Diouzh red al lezennoù » hag « Emglev-gwerzh, Penaos ez a en-dro ? »

Kalz fent a zo en danevell bet aozet gant Daniel Doujet : « Kerzhet a zo mat evit ar yec'hed ». Fent a zo ivez e pennad Martial Menard diwar-benn « Penaos ober kouez ? » Hag eñ prizoniad en toull-bac'h e Pariz. Ur pennad skrivet evit trede derez *Skol Ober*.

Div varzhoneg gant Jacques-Yves Mouton a c'heller lenn ivez : « Fromoù eus va bugaleaj ha barzhonegoù all ».

TH

Annaig KERVELLA,
Tudual HUON &
RIWAL HUON

Annaig KERVELLA,
Tudual HUON &
RIWAL HUON

HOR MIGNONED _____

Kaňv :

D'an 10 a viz C'hwevrer eo aet Erwan Vallerie da Anaon. Ganet e oa bet e 1944. E obidoù a zo bet lidet e Roazhon.

Anavezet mat e oa e bed ar brezhoneg, ar sevenadur hag ar stourmoù e Breizh. E 1969 e oa er skipailh en doa savet ar gelaouenn *Sav Breizh* (1969-1975) hag ivez ar gevredigezh *Skoazell Vreizh*, he fal o vezañ reiñ harp d'ar stourmerien doullbac'het. Savet en deus bet studiadennoù hag enklaskoù war dachenn an istor, ar yezh... Enoret e oa bet gant Kolier an Erminig e Naoned e 2014.

E-touez e levrioù o deus graet kalz berzh e kaver :

Diazezoù studi istorel an anvioù-parrez, teir levrenn, 1995

L'art et la manière de prononcer ces sacrés noms de lieu de Bretagne, 1996

*Ils sont fous ces Bretons ! Trousse de survie pour découvreurs
des Armoriques, 2003*

PROFOÙ

Miz C'hwevrer : Roger BIZIEN ; Alain PEIGNE ; Fañch PERU ; Pierre LE BAUT ; Gérard ROLLAND ; Ronan AN HENAFF ; Marie-José ALANOT ; Jean-Paul LEBLAY ; Herve POENS ; Alain GICQUEL ; Tangi LOUARN ; Manuel BIANNIC ; Pierre QUENTEL

— War un dro : 245€

Miz Meurzh : Jean-Yves KALLAG ; Elisabeth LE FEUVRE ; Pol Yvon VIROT ; Michel MANAC'H ; Collège Henri WALLON ; Huguette GAUDART ; Luc BIDEL ; Iwan AR FUR ; Yves GUILLOU ; Francis GOHIN ; Yann-Fañch BURLOT ; Bernard LE RALLIC

— War un dro : 250€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

LIZHIRI

*Ul lizher hor boa resevet gant Fulup Lannuzel goude pennad-
barn Herve Latimier e niverenn 450 AL diwar levr Pascal Rannou :
La littérature bretonne de langue française.*

E-giz ma lavar Herve Latimier ez eus peadra da vezañ hegazet gant randonerezh tud evel Pascal Rannou diwar-benn ar *vrais bretonnants*. Gant seurt tud eo mat sevel diouzhtu an daou c'houlenn a veze graet da vare Mae 1968 : piv oc'h-c'hwi ? Eus pelec'h e komzit-c'hwi ? Eeun ar respontoù : ur gallegger, agregad war ar galleg, o remzadiñ er skol hag er skol-veur c'hall ! Nag ar pezh kaer ! Kement-se a zo a-walc'h evit lakaat diskred warnañ. Lakaomp e ve lakaet da dalvezout e sturienn evit ar galleg e tlefe ar pennoù yaouank komz evel ma rae ar skrivagnerez Colette, ur gwir c'halleger ez anezhi... Selaouit mar plij he mouezh sonenrollet... Dirollañ a rafe da c'hoarzhin hor pennoù yaouank !

Ar brezhoneg a zo deuet da vezañ ur yezh a sevenadur, eleze unvan, bennozh da dud evel Ar Gonideg, Troude, Milin, Ernault, Herrieu, Hemon, F. Kervella, Etienne, Ménard... Bennozh dezho hon eus ur benveg gwevn. Amañ emañ ar gwir vrezhoneg. Ha kement-se a laka diaes hor c'helenner moarvat.

N'eo ket evit-se e ranker komz brezhoneg gant ur pouez-mouezh gallek, anat eo. Met evel ma lavarer, « deomp-ni eo ober kouez er gêr », ma vo gwennoc'h hon dilhad. Teir reolenn vras an distagañ a ranker pleustriñ da vat :

- An taol-mouezh war ar silabenn eildiwezhañ (dre vras)
- Ar silabennoù berr/hir
- Ar vogalennoù serr/digor

Evel-se e vo tu d'ar vrezhonegerien kozh pe yaouank d'en em gompren.

Aliañ a ran an dud da selaou pizh da skouer *Laboused e Bro-Leon, Marvaillou 5*, pennad-kaoz gant Ogust Seite, sonenrollet gant Mikael Madeg, hag a c'heller kaout war lec'hienn *Dastum*. Ouzhpenn ma 'z eo plijus an danvez, ez eo peuzheñvel lavar Ogust Seite ouzh ar yezh "lennegel".

Un tamm "marvailh" evit echuiñ. E 2005, e oa bet aozet un abadenn gant *SKED*, emglev-bro Brest, da-geñver un diskouezadeg war Amazonia en Abati Daoulaz. Me a oa an heñcher brezhonek. Un ugent den bennak a oa ganin. E-kerzh ar weladenn ez eas kuit un darn eus hor bagad, ha tud ar vro, "gwir vrezhonegerien" a heulias va frezegenn dirak ur penn Jivaro skurzhed. Ur wech er-maez, e teuas unan eus va achapidi da'm c'haout :

— Domaj eo ne vefe ket bet brezhonegerien a-vihanik ganeomp !

N'edo ket aze pa oa tostaet ar re-mañ ouzh ar bagad a oa chomet ganin...

ANJELA DUVAL E LANDEVENNEG _____

Enoret e vo Anjela Duval e Landevenneg. D'ar Sadorn 04/06 : barzhonegoù dibunet e galleg gant Paul Keineg hag e brezhoneg gant

Ninnog Latimier-K/ ha Fransoaz Louarn. D'ar Sul 05/06 e vo Annie Ebrel o kanañ testennoù Anjela Duval, ar re a vez kavet war he fladenn *Lellig*. Tri soner a vo ganti, Ronan Pellen, Daravan Souvanna ha Clément Dallot e Kreizenn sevenadurel An Ametist e Kraozon.

PRIZIOÙ 2022 E LANESTER

25^{vet} abadenn Prizioù Dazont ar Brezhoneg, aozet gant France3 Breizh, Rannvro Breizh hag Ofis Publik ar Brezhoneg a zo bet dalc'het er sal Kae 9 e Lannarstêr. Kinniget eo bet gant Goulwena an Henaff ha Yann-Herle Gourves. Startijenn a zo bet degaset gant sonerien ha kanerien ar pezh-c'hoari *War Hent Youenn Gwernig*, savet gant Strollad ar Vro Bagan.

Setu neuze disoc'hoù ar Prizioù 2022 :

Strollegezhioù

1. Ti Embann ar Skolioù (TES), evit bezañ bet troet arload « Kiou » e brezhoneg.
2. SDIS 29, evit bezañ savet fichennoù diwar-benn al lec'h-anvadurezh e brezhoneg.
3. Mor-Bihan Gwened tolpad kêrioù, evit brasaat plas ar brezhoneg er vuhez foran.

Kevredigezhioù

1. Stumdi ha Ti ar Vro Gwengamp, evit ar stummadur a ginnigont war micherioù ar radio hag al liesvedia.
2. Splann ! Ar gevredigezh gentañ gouestlet d'ar c'hazetenniñ-enklask e Breizh.
3. Ti ar Vro Landerne-Daoulaz, evit bezañ savet ur greizenn-dudi e brezhoneg.

Embregerezhioù

1. Miltamm, evit reiñ an tu da vezañ stummet e brezhoneg war micherioù ar vugaligoù.

2. Treebal : ur Whatsapp e brezhoneg.
3. Bagadini : roet ul lodenn eus an arc’hant da Diwan Breizh.

Lennegezh

1. *Morlenn*, Jorj Abherve-Gwegen, An Alarc’h Embannadurioù.
2. *Mehdi divroad*, Goulc’han Kervella, Skrid.
3. *E seizh avel ar bed*, Fañch Peru, Skol Vreizh.

Kleweled

1. *Dañsal dindan ar glav*, Goulwena an Henaff.
2. *Noz*, Soazig Daniellou.
3. *Fin ar Bed koulzad 2*, Nicolas Le Borgne.

Sonerezh

1. Youn Kamm, *Treizh*, L’Usinerie Production.
2. *Emezi* (Perynn Bleunven hag Elise Desbordes).
3. Denez, *Stur an avel*, Coop Breizh Musik.

Brezhoneger pe brezhonegerezh ar bloaz

1. Tifenn Merien ha Brendan Guillouzic-Gouret a zo deuet a-benn da gaout ul levrig-familh divyezhek digant ti-kêr Naoned.
2. Bleunvenn Konan, evit bezañ savet baleadennoù e brezhoneg.
3. Morgan Gilet evit bezañ savet an arload « Kwizh Brezhoneg ».

Dibabet en deus ivez ar juri reiñ “Priz ar galon” d’ar c’hannad Pol Molac, evit ar stourm a gas da benn evit ar brezhoneg er Breujoù e Pariz ha war an dachenn e Breizh.

Gourc’hemennnoù dezho holl !

ABADENNOÙ BALI BREIZH LAKAET DA NOZ... _____

ha ket skignet d’ar Sul evel sañset, en abeg da c’hoarioù olimpek 2022 ! Ha setu ur wech ouzhpenn graet dismegañs war ar yezhoù

minorelaet. Bremañ 'vez lâret d'an holl mont war ar rouedad, un doare d'ober fae war ar re n'o deus ket ar binvioù-se er gêr.

WAR AN HENT EN UHELGOAD _____

Kant vloaz zo, d'an 12 a viz Meurzh 1922 e c'hanas Jack Kerouac. Kristian Braz en deus troet e brezhoneg oberenn hollvrudet an Amerikan, *War an hent*. En Uhelgoad ez eus ur C'hafedi-levr di anvet « Sur la route » hag eno e oa bet pedet hon trouer d'an 12 a viz Meurzh 2022 evit un diviz/sinadur. Birvidik eo bet an eskemmoù. Tro en deus bet ivez Kristian Braz da lenn pennadoù eus al levr en teir yezh.

HAIKU MIZ MEURZH _____

Miz ar brezhoneg eo miz Meurzh. Intrudu hag oberiantizoù a bep seurt a zo bet gwelet o vleuniañ un tammig e pep lec'h. Gant *Afeà* e vez kinniget sevel haiku, bep bloaz. Ur ger bemdez a vez roet, d'an hini a gar kas e/he haiku a vez lakaet war facebook. Un doare plijus ha faltazius da skrivañ e brezhoneg. 3 linenn (5/7/5). Berr ha bev. Digor d'an holl, bras ha bihan.

MIRDI AN DEPARTAMANT E KEMPER : AR BARZHAZ BREIZH _____

Gweladennoù displeget e brezhoneg a vez kinniget gant Mirdi an Departamant. War a seblant e vo, d'an nebeutañ, ur weladenn bep miz. Troet hag advouezhiet eo bet an diskouezadeg a-bezh e brezhoneg, ha levrioù c'hoari a zo evit ar bugale.

Ur gwir soubadenn e-kreiz dastumad brudet kanennoù pobl Breizh, intent spered ar *Barzaz Breiz*, eus dec'h betek hiziv. Ober anaoudegezh gant temoù bras an dastumad-se – mojenn, istor,

buhez – dre oberennoù lennegezh, sonerezh ha livezh. Ur souba-
denn klevet ha gwelet !

Gweladenn displeget - Pad : 1e - Digoust

Mirout e blas(où) enlinenn : www.weezevent.com/visite-guide-barzaz-breiz-le-chant-de-la-bretagne

GERIADUR BREZHONEK AR VAG _____

Gouestlet eo ar studiadenñ-mañ da c'heriadur brezhonek ar bigi,
ar mor, al labour ha doare bevañ an dud a vor. Dastumet eo bet ar
pep brasañ eus ar gerioù (2008 ger) ha troiennoù brezhonek a gaver
er pemp levrenn c'hallek eus an oberenn *Ar Vag* embannet etre
1978 ha 2010 pe se. Soñjal a ra deomp e c'hell an danvez-mañ
bezañ talvoudus evit kalz a dud e-touez ar studierien pe ar glas-
kerien. Bez' e c'heller mont donoc'h c'hoazh er studiadenñ-mañ ;
danvez a chom d'an neb a garo kregiñ e-barzh, pe e vefe studier,
klasker, yezhonour pe geriadurour...

Gildas Le Bihan

*Lakaet eo bet enlinenn gant Kuzul ar Brezhoneg war e
lec'hienn : brezhoneg.org*

ETREZOMP-NI E BREZHONEG _____

War al load *emglevbroadoriant.bzh* e c'heller lenn bep sizhun
kronikennoù e brezhoneg gant Daniel Doujet. Pa oa em gavet gant
ar 169^{vet} pennad e oa kaoz gantañ eus ur filaj a oa bet aozet e
Kistinid ha dav lâret eo fonnus-kaer ha liesseurt an eostad. Kaoz a
vez eus tud vrudet evel Vincent van Gogh, Jack London hag ivez
Heneu, Lan Inizan, Herrieu ha lenn a c'heller ivez skridoù faltazi
bourrus ken-ken difluket diwar e faltazi pe un droiad beaj en
Dordogne.

AR YEZHOU, UR GLAD EN ARVAR BRAS _____

Ul labour divent eo hag a vo mirout ha reiñ buhez d'ar 6000 pe 7000 yezh a vez komzet hiziv an deiz war hon flanedenn. Penaos klask en ober ? N'heller ket lezel lod eus ar yezhoù a-gostez evit abeg pe abeg. Paouraat don Mab/Merc'h-den e vefe.

Penaos ez a ar yezhoù da get ? Abaoe pegoulz e tigrask ken buan niver hor yezhoù ? Penaos o deus ar Stadoù modern hag an deskadurezh broudet da skarzhañ ha da lazhañ kement a yezhoù dre ar bed ?

Rozenn Milin, istorourez, kelaouennerez ha renerez ar programm gall *Sorosoro* (programm evit gwarez al liesseurted yezhel ha sevenadurel) a c'heller selaou ha gwelet war *dailymotion*. Ar brezegenn-se a oa bet distaget e Pariz e Gwengolo 2019.

ROLL RAKTRESOÙ EVIT AR REDADEG 2022 _____

Embannet eo bet roll ar raktresoù a vo sikouret gant *Ar Redadeg 2022*, a loc'ho eus Gwitreg d'an 20 aviz Mae hag a zegouezho e Gwened d'an 28.

Arvorig FM – Prenañ studio fiñv - 7 000 €

Skoazellañ aozadur ar radio da brenañ dafar evit mont e darempred gant an dud war-eeun, tostaat ouzh an dud ha krouiñ danvez radio nevez.

Difenn - Aerlin, ar c'heriaoueg feminist ha LGDTE+ – 6 500 €

Geriaoueg brezhoneg ha galleg diwar-benn gerioù feminist ha LGDTE+ en ur mod niverel enlinenn war ul lec'hienn hag embannet e stumm ul levr.

Dispak – Dispak war vicherelaat - 12 000 €

Goprañ un den evit lakaat ur pennad enlinenn bep sizhun e-pad ur bloavezh d'an nebeutañ.

Guisseny Paddle – Paddle e brezhoneg - 2 000 €

Kinnig abadennoù sport (paddle da skouer) e brezhoneg d'ar grennarded.

Heklev – Heklev Podcast - 11 000 €

Kinnig podkastoù faltazi enlinenn war ul lec'hienn nevez da vezañ klevet ha selaouet gant an holl.

Lors Jereg Produiñ – Chadenn Youtube Lors Jereg- 2 500 €

Kinnig heuliadoù berr hag abadennoù brezhonek nevez war chadenn Lors Jereg.

Ti ar vro Gwengamp - Buheziñ 11-16 vloaz – 12 000 €

Kinnig abadennoù dudi d'ar grennarded e Bro-Wengamp betek Pempoull : sport, radio...

Ti ar vro Leon - Dudi er-maez a-vihanig e Bro-Leon – 1 500 €

Kinnig abadennoù dudi er-maez d'ar re vihan, bugaligoù a-raok ar skol.

Ti Douar Alre – Atalieroù evit ar vugale - 4 500 €

Heuliad atalieroù e brezhoneg evit ar vugale adalek 4 pe 5 bloaz.

Toumpi – C'hoarioù e brezhoneg - 10 000 €

Embann daou c'hoari e brezhoneg evit ar vugale.

Bemdez – Chadenn Youtube Seizh Kalon - 6 000 €

Embann c'hoarioù nevez e brezhoneg evit boueta ur chadenn youtube c'hoarioù gant Sten Charbonneau.

Cac Sud 22 - Le petit théâtre - Le P'tit téyâtr – 2 500 €

C'ët le premier espektacl en galo qi méleyera la poupine de bouéz, la musique e le parlement.

Abadenn vev kentañ e gallaoueg hag a vesko margodennoù, sonerezh ha gallaoueg evit ar vugale.

LIZHER SIZHUNIEK MICHEL FELTIN-PALAS : SUR LE BOUT DES LANGUES

Ral e vez d'an dud uhel o c'harg difenn ar bihanniveroù, tapet ma vezont gant froud ar vrud, hent ledan soñjoù boutin ar gevredigezh. Michel Feltin-Palas, n'eo ket eus an dud-se, evit doare. Er bloavezh 2002 en doa krouet ur rann *Régions de L'Express* (pemp embannadur rannvro bep sizhun ha 10 a dud o labourat evite) ha kaset ar raktres

war-raok betek 2013. Etre 2013 ha 2019 e oa pennkazetenner an *Express* ha *grand reporter* war un dro evit ar servij *France*.

E 2018 en doa savet ur blog sizhuniek da zifenn ar yezhoù anvet *Sur le bout des langues* ha se evit ar gelaouenn *L'Express* : « Simpl eo an diazez, emezañ, atav e tifennan (e warezan) ar yezh wan a-enep d'ar yezh kreñv, ar galleg a-enep ar saozneg dre ar bed, ar yezhoù rannvro a-enep ar galleg e Bro-Frañs (*Bearn Pyrénées : ambassadeurs du Béarn*). »

E-giz ul lod bras eus tud Bro-Frañs emañ familh Michel Feltin-Palas genidik eus unan eus rannvroioù Bro-C'hall. Parizian 'oa e dad, eus ar Bearn e oa e vamm avat. Goude ma oa Michel bihan o chom e Seine-Saint-Denis, e teue da vakañsiñ ingal da di e eontr hag e gendirvi, e traoñienn Ossau. Gante en deus komprenet « petra 'oa ur sevenadur minorel, ur sevenadur all bresk, en arvar a ranked difenn ». P'eo marvet e vamm en deus graet e soñj deskiñ yezh e vro. Nevez zo en deus skrivet ul levr asambles gant J.M. Apathie, *J'ai un accent et alors ?* (Emb. Michel Lafon).

Alies e tifenn ar c'hazetenner paz-ha-paz ar yezhoù minorel en e bennadoù sizhuniek a-enep da soñjoù tud vrudet. En e bennad d'an 08/06/21 da skouer e ya a-enep da gomzoù ar yezhoniour brudet Alain Bentolita. A-du emañ gantañ pa lavar hemañ diwar-benn ar yezhoù minorel int bet dichenus. Enebiñ-naet a ra Michel Feltin-Palas outañ avat pa lavar ar yezhoniour « *éduquer en français dans nos écoles fut une décision de **partage** et d'**égalité** de chances* ». N'eus ket bet kaoz eus rannañ, eme gazetenner an *Express*, ur redi eo bet implij ur yezh all. Evit ar pezh a sell eus kevatalded ez eus bet roet plas « d'ur yezh skedus » ha taolet a-gostez ar yezhoù all d'an dud d'ober gante en o buhez prevez nemetken.

Un toullad arguzennoù diazezet war fedoù, war gomzoù splann a vez e lizhiri sizhuniek Michel Feltin-Palas, notennoù diwar-benn araokadennoù pe kiladennoù war dachenn hor yezhoù : danvez da glask kendrec'hiñ an holl re a gav dezho c'hoazh, ne c'hall yezh all ebet bevañ kostez-ha-kostez gant ar galleg hep bez' e nebour.

Ma 'peus c'hoant resev lizher sizhuniek Michel Feltin Palas it war internet : www.lexpress.fr